

Niv. 53
15 mezheden — 15 gouere 1974

« POBL VREIZ »

B. P. 304

29273 BREST CEDEX

KOUMANANTOU

Boatin : 6 L

Skoazell : adaleg 15 L

K.R.P. 2746-79 ROAZON

0,50

POBL VREIZ

ECHU ANABADENN!



N'EO KET KOULZ AR BINIOU
HAG AR SONEREZH MEUR !



Ar C'huzul-seveniñ o labourat

PENNAD-STUR

Aet eo an tu-kleiz war-raok, met n'eo ket aet e-barzh. Ar pezh a zo gwir evit an Egzagon Gall zo gwiroc'h c'hoazh evit Breizh. Frealzus eo an disoc'hou (résultats) amañ. N'eomp ket da ganañ kan an trec'h, evel ma ra lod, met arabat dimu fallgaloniñ kennebeut, rak evit ar wech kentañ eo deuet ar maout gant an tu kleiz en un departamant eus hon bro, hini Aodoù-an-Hanternoz, ha se goude ma talc'h ar vro da goll he yaouankiz gant an divroañ.

Al labourerion vreton ne vezont ket gennet ken aes ha gwechall gant ar

bruderezh ofisiel. Krog int da gompren pegeen divalav eo o gounidegezh : en Breizh zo div wech muioc'h a smigarded eget e lec'h all.

Div gentel zo da dennañ eus ar votadeg-se :

— Votet o deus an dud ar wech-mañ, en Egzagon, diouzh o renkad (klas). Gouvezet e vez gant ar sontadennoù penaos an tri-c'hard eus ar vicherourion (ouvrierion) o deus votet evit Mitterand, hag an tri-c'hard eus ar sternioù uhelañ evit Giscard. En amzer De Gaulle hag e hér (héritage) Pompidou, e veze dallet kalz a dud ; De Gaulle a veze evel un doue evit ur bern tud. Bremañ ec'h eo sklaeraet an traoù avat, hag al labourer-

ion a oar pelec'h skeiñ. En Breizh avat, n'eo ket bet ken skaer ar vot, alese an eil gentel-mañ :

— Votin a ra ur bern kantonioù eus Breizh evel an trevadennoù (Kolonioù), pezh n'eo ket souezhus peogwir, d'hon meno, ec'h eo Breizh un drebadenn. Evit gouzout hiroc'h, lennit pennad Fañch Morvannoù (pajenn 5). Da c'hortoz, e vo tra-walc'h gant ar pevar sifri-mañ :


Wallis ha Futuna	: Giscard 94,8 %
Kerlouan	Giscard 88,5 %
Afar hag Issa	/ Giscard 78,4 %
Lesneven	: Giscard 75,6 %

Labour zo d'ober c'hoazh, neketa ?
Bec'h dezhi eta !




AR RAZH

AR RAZH A VEV EL LOUSTONI



DEBRIN 'RA LOUSTONI...



... HAG E RA TEMZ.

HAG AN NATUR A GRESK.

E-LEC'H AL LOUSTONI



PA VEZ KLAÑV E VEZ DEBRET
GANT UL LOEN ALL



'VEL-SE NE GAVER, NEMET
RAZHED YACH !

ARABAT DEOC'H AVAT
TEUREL POEZTHON
D'AR RAZHED.



PE NE VO RAZH EBET KEN
'VIT DEBRIN HO PERN LOUSTONI...



HAG E TAPPET
KLEÑVEJOU SPONTUS !



RAZHED 'VEZ
KAVET E PEVAR
KORN AR BED



AN DEIZ MA VARVO
TOUT AR RAZHED
E VARVO
TOUT AN DUD

Muri Seitek —

NAETAAT A RA AR RAZH
AR BED LOUSAET GANEOMP

AR RAZH A ZO UL LOEN PRISIUS .